

## MIK - MIK - MIK...

(SON AR MILINER)

Eur vilin goz ez-eus, du-hont barz an draonienn; (2 wech)  
Ar miliner he dali zo kaer e vleo melen...

DISKAN

Ha mik-mik-mik,  
Ha mak-mak-mak,  
Ha oein-oein-oein,  
Peb unan d'e dro,  
Maluret!  
Hag ar vilin a dro...

(2 wech)

Ar miliner he dali zo kaer e vleo melen: (2 wech)  
An oll merhed tro-dro a ya da gas o greun.

Oll merhed tro-war-dro a ya da Vill-ar-Yun, —  
Med ar muia karet a zo Soaz Penn-ar-Run.

Med ar muia karet a zo Soazig ar Born;  
Heñ a grogas 'n he born, he zachas en eur horn.  
Heñ a grogas 'n he born, he zachas en eur horn;

Ouz safron ar vilin e kouskas Soaz ar Born.

Kousket reas Soazig ouz safron ar vilin,  
Pa zihunas ar plah, oa deuet ar mintin...

— Petra laro va mamm, pa zistroin d'ar gêr,  
P'am-mo kousket eun nez e ti eur miliner?

— Petra vo laret deoh, peogwir me, Matilin,  
E ouzon va micher ha pa dro ar vilin...

(Kanaouenn euz Bro-Wened.)

# "mouez

## Mari Gollet, pe Son Mari Vastrouill

War don ar ganaouenn saoz : « Clementine ».

1

Me zo 'paouez koll va mestrez,  
Eet eo kuit euz ti he zad!  
Larit din m'ho-peus he gwelet  
Ma he havin-me timad...

DISKAN

Keuz em-eus da Vari Vastrouill,  
Keuz em-eus da Vari gêz!  
P'leh an diaoul he havin bremañ?...  
Kollet 'm-eus va Mari gêz!

2

Mari Vastrouill a zo luchez,  
Eur fri tougn zo ganti hoaz,  
Lagad pikouz, pikou panez,  
Ha me oar-me petra hoaz!...

3

Kalz re hir e oa he lostenn,  
Ha lare an teodou fall...  
'Ran ket forz euz pez a laront:  
Mari Vastrouill dalv eun all!

4

Kreñ eo Mari 'vel-eur-gazeg  
Hag a fring e-kreiz ar prod...  
Spontet vetch ha pa welfeh  
Pegen hir eo he daoudroad...

5

C'hwez al ludu zo gand Mari:  
Na 'vid-se n'eus ket he far,  
D'ober krampouez gand bleud malet,  
Lêz ar zaout ha viou yar!

6

Me a varvo ma n'he havan!  
Va halonad zo leun-barr!  
Klaskit Mari va zud karet,  
Kement hini zo din kar!